

Ar golo-lizher

« L'œil était dans la tombe et regardait Caïn... »

Victor Hugo

— Amañ, gant ho lizherennoù-tal... Mat. Hag aze... En traoñ adarre, ya. Amañ c'hoazh, ho sinadur gant ar meneg « lennet hag aprouet » hag an deiziad mar plij. Dispar ! E surentez emac'h. Lakaet em eus ur c'hamera ouzhpenn, buket war-zu ar jardin. Profet eo hemañ. M'hoc'h eus chañs e weloc'h lern pe yourc'hed, ha piv 'oar, ur c'houblad bennak o c'hoari daou dindan ar gwez... Grit sin din neuze ! Ha soñjit mat, didrouz ha diwelus eo hor c'hameraioù ha n'eont en-dro nemet pa dremen ur boud bev bennak dirak ar radar. Un draig c'hoazh : n'it ket da lavarout da zen ebet hoc'h eus lakaet kameraioù. Er sekred emañ an efedusted ! Tud zo a gemenn gant pegsunioù o deus lakaet o zi dindan gwarez kameraioù... Gwelloc'h troc'hañ rak an droug, a soñj dezho... Ur fazi bras ! Al laeron a guzh o dremm dindan kougoulioù neuze hag a zistruj ar c'hameraioù.

Asantet en doa Jil Fili degemer ar gwerzher yaouank-se d'ober plijadur d'e dad. Hemañ en doa skoazellet anezhañ gant e dailhoù p'en doa prenet e genkiz. Un afer deknel

a-walc’h gant al labourioù gwrezdifuiñ... Morse n’en doa bet tro da ziskouez e anaoudegezh vat dezhañ. Kroget en doa e varmouz gant e vicher gwerzher e ti Aktalarm hag hervez doare ne oa ket un ebat gwerzhañ sistemoù-diwall tro-war-dro. Sioul ar Jeorjianed amañ e Perroz... Paourkaezh paotr, a soñje Jil, ne vije ket bet gouest-eñ da foetañ bro e-giz-se war glask klianted. A-hed e vuhez en doa Jil Fili douget dorn d’ar re yaouank. Ar re zilabour ha diziplom dreist-holl. Peotramant prizonidi o tont ermaez eus an toull-bac’h. Adkenempradur kevredigezhel¹, emezo gant o yezh paper lufr... Anavezet e oa evel ar bleiz ruz er metoù gwardvezegel² hag en embregerezhioù Bro-Dreger. Bremañ pa oa aet war e leve, e oa gwell gantañ bevañ en e drankilite ha morediñ dirak an ouf skedus. Dleet e oa dezhañ.

Mat a-walc’h e tenne ar paotr yaouank begig e spil-henn. Un tammig reut, marteze, gant e zilhadr teñval, e vlev berr kribet naet hag e varv daou zevezh troc’het aketus. Bremañ pa n’eus ket mui a reizh c’hourel pe venel, sañset, eo deuet ar barv war wel en-dro... Diskouez a rae an den yaouank bezañ en e vutun, war-bouez un draig en e vouezh. Re asur e jestroùigoù prim ha resis pa droe ar follennoù, pa verke al lec’h sinañ gant beg e viz-yod. Gant e roll hag e gentel edo. Danvez a oa ennañ, met n’en doa ket kavet e stil c’hoazh. Glas e vegel... Hegarar e oa bet Jil, ken e oa bet. « Bara benniget ! » he dije lâret e vamm... Ya, prenet en doa ar sistem klok, pemp kamera, tri en diabarzh, daou en diavaez. Hag unan ouzhpenn er jardin, an hini “digoust” ... Van en doa graet da grediñ en

1 *Réinsertion sociale.*

2 *Médicosociaux.*

doa graet un taol ruz ha trugarekaet en doa ar paotr war ar marc'had... Ken diaes eo bezañ yaouank...

Ur vezh dispis a sante en e zon-donañ koulskoude, hag a vire outañ a vourrañ gant ar peoc'h nevez c'hounezet. Bezañ distrobet eus ar gwerzher yaouank a oa un dra vad, douetañs ebet war se. Bezañ gronnet gant kameraioù avat.... E-giz pa vije un teñzor da ziwall eno. E-giz pa vije anezhañ ul larvenn lart o peurleuniañ he c'hlozenn seiz, prest da zic'houzougañ an estrañjourien gant he c'harvanoù. Ur bedenn gozh da Sant Kristof a zeuas war e spered. Distaget e veze e fin an oferennoù en e gêriadenn vihan, pa 'z ae en e vragoù-berr. *Sant Kristof, hag hoc'h eus prometet ho sikour d'an holl re hoc'h asped, gwarezit ac'hanomp, ni, hon tiez hag hor madoù, ouzh nep gwallzarvoud...* Morse n'en doa en em santet ken digenvez war al leurennig m'edo o kemer e dro eus bannoù diwezhañ an heol. Splujañ a rae selloù hiraezhus er mor entanet, e gwarez ar faouenn ruz ramzel. Aloubet e voe gant ur c'hoant didrec'hus d'ober ur vad bennak d'unan bennak. D'ar c'higer, da baotr al lizhiri... pe mont da di ar re gozh da ganañ *Le temps des cerises*... M'en defe adc'houlennet e amezeg digantañ diskoultrañ e wezenn faou en dije asantet raktal. Paourkaezh Herri, gant e di dres a-dreñv ar wezenn hollgaer-se. Ne wele liv ebet eus ar mor, nemet e-kreiz ar goañv, pa veze dibourc'h ar faouenn ha trist pep tra, peotramant dre lomber e c'hrignol... Nac'het en doa Jil. Jentil, met start. Ar gwez n'heller ket o mac'hagnañ. Darempredoù seven en doa miret gant e amezeg evelkent hag ur vad bennak a rae an eil d'egile ur wech dre vare. En em zigarezet en doa Jil. Ur wezenn ken meurdezus, ouzhpenn dezhañ e oa...

Balbouzet en doa Herri e komprene. Met krenadenn nervus e vourroù mouskeder a zislavare e gomzoù. Evit goulenn e bardon en doa prestet Jil e douzerez tredan nevez-flamm dezhañ. Ur Bosch diorjal. « Da skrin da galon, Herri ! » a soñjas Jil oc'h adleuniañ e werenn.

N'eus ket par d'ar wiski evit lakaat al levenez d'en em ledañ a-hed-gwel. Pas n'eus forzh peseurt wiski evel-just. Japanat ? Ket. Ne oa ket ur snob anezhañ. *Yeun Elez Jobik, Eddu Brekilien, Kornôg Pleuvian*, ar vegenn eus ar vro. Gant ar bier n'eus nemet plijadur berrbad da gaout. Plijadur ar c'horf, ha c'hoazh, pa vezer sec'hedet mat. Diskenn a ra ar freskter dre ar bruched evel ul litenn vunut, aloubiñ a ra ar c'hof, hag en em silañ betek ar c'hofoù-gar zoken, pa vez tomm-gor. Met morse ne sav betek an empenn, sez ar spered. E-kichen ar wiski... Da-heul al lonkadenn gentañ e tispak ar wiski petalennoù vanilhet e foñs ar gorzailhenn tra ma krog da zañsal an dremmvro war begoù he zreid. Gant an eil gwerennad e saraç'h ar spisoù dousigoù ha gant an trede e teu da vezañ fraeshoc'h-fraeshañ chuchumuchu an aeled... Neuze e vez digoret dorioù pounner hor c'hreizon gant ar c'hrad-vat. Mont a ra an ene d'en em goll e kriadeg ar gouelaned.

Ne veze ket lakaet ar c'hameraioù da vont en-dro pa veze Jil Fili en e di. Ne rae ganto nemet pa 'z ae da welout e c'hoar Kristinn e-kichen Roazhon. Pouezañ a rae war "on", tra ken. Goude-se e rae war-dro ar stalafioù hag erfin e wirie div wech ha morailhet mat en doa dorikellig ar jardin. Pa zeue en-dro, daou zevezh war-lerc'h, e c'hortoze an noz da deurel ur sell ouzh an enrolladennoù. Ne oa nemet lammoùigoù konifled hag ul labous noz bennak da welout war ar skramm. Amourouz ebet. Daou gi... Ret e vefe dezhañ gwiriañ stad ar c'harzh. Naet-eston

e oa ar skeudennoù, daoust d'an noz. N'en doa ket ar paotr yaouank livet gevier.

— Sell 'ta piv ! Hag a nevez e Roazhon ?

— Bo... Lak *An Tregor*, mar plij... Gabi a zo gant e vacho er bloaz-mañ. Bidoc'hig Kristinn, soñj 'teus ? Streset ar vamm, muioc'h eget he mab, 'm eus aon.

— Keit ha n'emañ ket o straniñ gant an hailhoned-se a gav o flijadur o tifonsañ ar c'hilsellerioù. Straedoù a-bezh ! ... Loened brein !

— Amañ e Perroz ivez ?

— Na petra 'ta ! Chañs 'teus da gaout ur c'harri klot, Jil. 'To ke' met lenn war pajennoù Lannuon ha Perroz. Hag er bourkioù bihan tro-dro zoken. Ar sport nevez eo !

— Chaous... Stanket an traoù evit ar re yaouank. Ha n'eo ket e Lannuon e vo kavet un diskoulm er mare-mañ...

— Gwir. Met 'vo ket kavet an diskoulm o plantañ taolioù troad gant ar c'hirri, forzh penaos...

Gant e d'Wingo kozh e oa deuet Jil en-dro. Kentañ tra a rae goude digêriañ e oa prenañ ar gazetenn hag un nebeud defaotajoù. Neuze e c'hoarie an dro d'e jardin. Lagad ar mestr. Leuniañ a rae e skevent gant an aer iodek o serriñ e zaoulagad, ha dianalañ war e c'horregezh evit peurluniañ e zomani gant e c'hwezhadenn. Difiñv e chome ul lajad hir o selaou richan an driski mesk-ha-mesk gant kriadennoù al laboused mor du-hont. Hedet e oa kael ar jardin gant ar ru, en traoñ. Hag en tu all, ar mor...

Un eil buhez en doa bet gant e jardin. Bleunioù ha

legumaj a c'hounenze gant ar memes karantez. Fier ha laouen e oa pa eskemme ur bezeliad piz bihan ouzh ur banerad *Beurre Hardy* gant e amezeg, pe pa brofe ur boked elestr d'ar werzherez mel, e straed ar Marichal Joffre. « Deuet int holl asambles er bloaz-mañ, gant ar glav zo bet. »

Azezañ klok a reas e foñs e gador-vrec'h lêr ha pouezañ war nozelenn ar pellurzhier. Skeudennoù gwenn-ha-du a zeuas diouzhtu war ar skramm. Noz e oa. Ur c'hazh treut a bourmene e galite a-dreuz al letonenn. Lamm a reas war ar morgleuz war gaout an toennoù. Ur vrumenn skañv a blave war e lent a-us d'ar geot. Fresk eo an noz, a soñjas Jil. Ur skeudenn zispis a zeuas war wel a-droc'h-trañch. Un drolinenn e oa. Edo o tostaat ouzh an ti a gammedoùigoù indian. Gant se e oa bet roet lañs da gamera ar jardin. Resisoc'h e oa bremañ. Boutoù sport a oa e treid an den hag ur jogging teñval en-dro dezhañ. Damguzhet e oa e benn gant penngab e sweat-shirt, hag ur seurt skerb a c'holoe e zremm betek e zaoulagad. Ken trumm e oa c'hoarvezet ma voe darbet da Jil fatañ. Ur stroñs euzhus a santas en e feultrin. Tostaat a reas e benn ouzh ar skramm dre vondoug, gant ar c'hoant diverzhout tresoù an den dianav. N'oa ket tu. Ne wele nemet un daoulagad lufus ur wech dre vare pa veze ensellet an tro-war-droioù gant an estrour. Hervez kont ne oa ket sioul e goustiañs. Ma ne wiske ket ur gougoulenn, evel diouganet gant ar gwerzher, ne felle ket dezhañ bezañ anavezet evit kelo. Ur benveg iskis a oa gantañ en e zorn dehoù. Ne zeuas ket Jil a-benn da zivinout petra 'oa er penn kentañ. Pa voe erru an den war al leurenn, dres dirak an ti, e teuas da vezañ sklaeroc'h : un talar-tro ! Ne voe ket Jil evit mirout a deurel ur sell tro-dro, er saloñs.

Nann, ne oa roud ebet eus nep laeroñsi. Merzh et en dije forzh penaos. Netra torret. Pep tra a oa en e blas. Chomet e oa an taolennou ouzh ar mogerioù. Hag an tele, evel-just... Ne oa nag arc'hant na traezoù talvoudus en ti. Eñvorennoù nemetken... Forzh penaos, gant un troad-heizez eo e vez divarc'het an dorioù ha neket gant talarioù-tro...

A-greiz-holl e troas an den war-zu ar faouenn. Palvata a reas anezhi gant e zaouarn maneget ha mont a-dreñv ar c'hef, en tu enep. Mousc'hoarzhin a reas Jil o soñjal ne oa ket ezhomm en em guzhat a-dreñv ur wezenn evit dizourañ e-kreiz an noz. Distenn a reas. Mat... Ne weled ket mui an den eno gant ar c'hamera, nemet finvadennoù e ilin kleiz o tresañ kelc'hioù bihan lusket mat er vann, izel a-walc'h. Daoubleget e oa an estrour, evit doare, tal-ha-tal gant ar wezenn... « Met petra an diaoul emañ oc'h ober, nonde ! » A-daol-trumm e voe desachet evezh Jil gant un trouzig digustum, ur seurt grigoñsig ingalingal. N'en doa ket taolet pled, kentañ-penn, sorbet ma oa gant ar skeudennoù. Re heñvel e oa ouzh un ardrouz bennak gant ar c'hamera pe kentoc'h ouzh krignadenn ul logodenn. Met... « Biskoazh c'hoazh ! Gagnoù ! Oc'h ober toulloù e troad ma faouenn ruz emañ gant e dalar-tro ! Tamm teil ! Ma faouenn ! Petra emaut o turlutat gant ma faouenn ? »

Eizh munut kreñv e padas ar c'hoari. War ar glaou ruz edo Jil. Ur wechig an amzer e save an den e chouk ha teurel ur sell a-gostez war-zu an ti. « Nann ! n'eus den ebet, paourkaezh bleub, e Roazhon emañ ! » Neuze ez adsavas da vat hag e kilas un tammig ken e voe dindan lagad kamera ar jardin adarre. Tennañ a reas ur voutailhig eus e chakod. « Yec'hed mat dit, mab ar c'hagn ! »

a rec'has Jil. Diviñsañ a reas an estrañjour ar stouv ha stouiñ adarre a-dreñv ar wezenn. Un teir munutenn bennak e chomas daoubleget e-giz-se, tost difiñv. Petra a rae al lastez-se gant e voutailh bremañ ? Pa voe echu e tiskrabas an den an delioù sec'h tro-dro hag e savas e gein trankilik. Fourrañ a reas ar voutailh en e chakod. Dastum a reas an talar-tro gant e zorn kleiz hag e troas war-zu an ti oc'h hejañ e veilh-dorn dehoù ! « Ma Doue. Piv an hanter egaret-se ? » A-greiz-holl e voe hejet an estrour gant ur streviadenn greñv. Ur wech, div wech... Tennañ a reas e skerb evit analat gwelloc'h ha streviañ un trede gwech. Amzer en doe Jil da spurmantiñ mouroù hir ha fin. Mouroù mouskeder... « Herri ? Herri ! Tamm gagn ! Te eo ! Nondedistag n'eo ket gwir alato. Herri Garrek ! » Buan-ha-buan ez adlec'hias Herri e skerb, ha steuziañ en noz, hep kenavo. Du ha mut e chomas ar skramm prestik goude.

Sevel a reas Jil en un tenn, o krenañ evel ur barr delioù, ha d'ar red betek ar faouenn ruz.

Evit ar c'hentañ gwel ne oa netra iskis, nemet e weled e oa bet mesket an delioù sec'h gant man ha douar e troad ar c'hef. « Nondegast, petra an diaoul en deus graet al loen brein-se ? » Gant e droad e pellaas an delioù sec'h diwar kef ar wezenn hag e stouas evit sellout pishoc'h. Ne wele tra ispisial ebet. Tremen a reas e zorn ouzh ruskenn flour ar faouenn. Sed e santas un diforc'h soutil war ar gorre gant beg e vizied. Tost diheverz e oa. Mont a reas war e zaoulin ha sellout a-dost. Teir medallennig pri a oa enluc'het er ruskenn. Krabisat a reas. Freskik e oa ar pri c'hoazh. Kleuziañ a reas un tammig war-bouez ivin e viz-yod, hag a-greiz-pep-kreiz e teuas un toullig war wel, ken ledan hag ur pezh un euro. Ur seurt dourenn arc'hlas

a ziveras eus an toull hag en em veskas gant an douar.
« Klasket en deus al louston-se lakaat va faouenn da gre-
viñ gant pistri ! » Splujañ a reas e viz en toull kentañ.
Ne zeuas ket a-benn da dizhout ar foñs. Tri zoull don en
doa graet Herri er c'hef gant e dalar-tro, dres dindan live
an douar, leuniet en doa anezho gant pistri, ha kuzhet e
dorfed gant ur stouv pri. Brav !

Ne voe ket pell Jil o tegas ar gorzenn dourañ ha naetaat
an tri zoull gant aked bras. O leuniañ a reas gant mastik
da c'houde, hag ar stouv pri war c'horre, a-raok adlakaat
an delioù sec'h en o flas. Saveteet e oa ar faouenn ruz,
douetus. Ha ma teufe Herri da deurel ur sell, n'hellfe ket
divinout e ouie Jil. Bremañ e oa poent kaout un dic'haou
ha reiñ ur gentel d'al lorgnez-se. « Fent a vo Herri. C'hoant
'peus bet c'hoari ? C'hoariet 'vo, hag e vo ! Ma oufes petra
zo en hent evidout... »

« Aotrou ker, Aotrou fall...

*N'eo ket brav-brav ar pezh hoc'h eus graet d'ar paourkaezh
Jil Fili. Ne oar netra c'hoazh, chañs hoc'h eus. Met ni a oar
pep tra. Muioc'h a chañs hon eus, neuze ! Ho kwelet hon eus,
va c'heneil ha me, e-kreiz an noz, digwener, d'an 3 a viz
Mae, da ziv eur ha kard. Gwall veureek oc'h Herri Garrek.
Evit pakañ louarn pe c'had eo ret sevel mintin mat, diouzh
a lavarar... Re wir ! Gwelet hon eus ac'hanoc'h o treuziñ
jardin Jil Fili gant un talar-tro. Itriket omp bet, alato...
Ha p'hoc'h eus staget da lakaat tro en ho penveg ouzh troad
kef ar wezenn vras du-hont, 'tal-kichen an ti, va frei en
deus kroget da filmañ gant e bellgomz. Mat a-walc'h eo ar
skeudennoù, en desped d'an deñvalijenn. Chañs hon eus,*

ya. Na pegen divalav diouzh ho perzh avat ! A-boan echu ho tammig labour ganeoc'h, hoc'h eus tennet ho skerb evit streviañ en o aes. Ur mennozh mat ! Met chañs fall ar wech-mañ : ho tremm a weler splann war ar filmig. Un dremmig ront gant mourroù hir ? Se eo ? Divizet hon eus heuliañ ac'hanoc'h goude ho torfed. N'eo ket bet padet gwall bell ar chaseadenn ! Chañs hon eus bet-ni adarre... Na souezhus ! Un amezeg... Gant hoc'h anv skrivet aketus war ho poest-lizhiri... Ha memes tra gant hini ar paourkaezh Jil Fili. Deus ar c'hentañ ! Setu reolennoù nevez ar genskoazell hag ar vignoniezh e Breizh neuze. N'ouzomp ket petra a soñjo paotred Ma'i Robin deus an taol-kaer-se ? Ha Jil Fili, ma teufe da c'houzout... Diaesoc'h an darempredoù etrezoc'h, moarvat... Ne rit ket bil. Un diskoulm zo da bep tra. Ha ne gousto ket re ger deoc'h. Priz ur c'houzavadenn³, tra ken. Tud rezonapl zo ac'hanomp. Lakait 1000€ en ur golo-lizher, gant ar meneg "Trugarez Jil" warnañ, ha mat pell zo. Warc'hoazh da zek eur noz e vo ar voul ganeomp c'hoazh, rak lezel a reoc'h ar golo gwarniset er boubellenn voger ouzh an tiig e korn Straed Porzh Nevez ha plasenn an Dieubidigezh. Un anv skouer, kea ?

Deuit d'an eur rik mar plij, evel ma rafe ur Roue !

Bennozh Doue deoc'h Herri.

Mignoned nevez Jil Fili

GS 1 : Arabat chom da straniñ da-heul ho tammig tro. Unan ac'hanomp a vo oc'h evezhiañ ac'hanoc'h, tra ma vo egile o sevel ar c'havell...

3 Avertissement.